



## RECIT TRUEZUS

995 B

*Var ar Maleur horrubl erruet e Passach, ar  
Pors-Nevez, entre Riec ha Moëlan, arron-  
dissamant Qemperle, canton Pont-Aven, ar  
14 a vis Gouere.*

Var ton : *Christ bras ar Vur.*

JESUS, Salver adorabl, prosternet d'an daoulin,  
Dirac ho treid beniguet, ô Majeste divin !  
E teuan da implori diouzoc'h sclêrigen,  
Da zespeigni va recit d'am breudeur c'hristenien.

Er bloa nao, pe mil eis cant ha c'hoas unan ouspen,  
E chomen en bourg Moëlan, joaüs bras ha laouen ;  
Mes hirio eur maleur bras erruet er vro-se,  
Am laqa oll contristet dre ur güir garante !

Ur spont horrubl a laqa va c'halon da straqal,  
Pa deu ar reflexion da ober din sonjal  
Er maleur an euzussa a elfet da glêvel,  
Pehini a so, sionas, a nevez erruet.

Ebars canton Pont-Aven, etre Riec a Moëlan,  
E mâ passach Pors-Nevez, a so hir a ledan ;  
Eno mâ lec'h ar maleur e zan da zisclêria ;  
Selaouit oll, Bretonet ; deut ganen da vouela.

Ar bevarzec a Vouere voa pardon Sant Leyer,  
E pelec'h en em reate ar bobl a bep qartier,  
Un nombr bras deus a Voëlan, ar joa en o c'halon  
A zirede a vanden d'oferen ar pardon.

Rentet e tal ar passach, hac er vag antreet,  
E saïlle ebars enni ha pautret ha merc'het ;  
En peb penn, ebars er c'hreiz, ha var ar bord neuze,  
E voa couchet an dud geiz an eil var eguile.

Anfin, an oll a grie : aoualc'h omp evellen ;  
En han' Doue na lezit bremâ den da antren ;  
Ouspen cant e momp amâ, hep gallout remui :  
Hôn tremenit ta buan vit dont d'hor soulagi.

Querqent ar vag a bella euz a zonar<sup>o</sup> Moélan,  
 Mes gant peb precaution ha calz demeus a boan ;  
 Grêt voe dezi trei a benn ;... mes ar mor furorus  
 A antreas dre eno var an dud maleurus.

Leun a spont hac egaret, en em doljont racial  
 Evel tud disesperet avanden er pen all ;  
 Mes gant ar bouez hac ar strong...ô Doue ! pezh horror !  
 Ar vag a voe confonet racial e fonç ar mor.

Doue a visericord ! ô Tad carantezus !  
 Sellit a gompasion ous an dud maleurus...  
 E maint aze ouspen cant en goelet ar mor don  
 O va Zalver adorabl ! pardon ! pardon ! pardon !

Deut... diredit, Bretonet, en plaç eus ar maleur ;  
 Sellit gant pebes courach ha gant qen bras ardeur  
 E teu an oll da essa diffram ous ar maro  
 An dud maleurus rentet en eur stat qen garo !

Ar merdaidy a saille ebars en o bagou ;  
 Darn all a furebe er mor armet a berchennou ;  
 Mes allas ! ô va Doue ! daoust d'o bolontez vad,  
 Hac o c'hourach dreist muzur, collet voe ar vogad.

Pebes spont e voa guelet eno ar mor o veivi,  
 Gant ouspen cant maleurus o vonet da veuzi !...  
 An eil crog en eguile a ruille e fonç ar mor....  
 O erial : sicour ! sicour !... O Doue ! pezh horror !

Cri e vije ar galon, ha cri ma na vouelje,  
 O clévet ur bobl immanç, test eur ar maleur-se,  
 O erial, o teplori, leun eus a zizesper,  
 En defot n'ellent donet da recours an dud qer.

Mes, <sup>admiromp,</sup> Christenien, ar gourach magnific  
 Eus ar meliner yaouanç Emmanuel Coantig  
 O plongi e fonç ar môr, hep cás eus e vuc,  
 Evit dont da sauetat an dud paour a veuze..

Qerqent m'eo dije tennet eure a fonç ar mor,  
 E saille c'houz a nevez gant ar brassa ardor :  
 An oll a voa estonet o velet e gourach ;  
 Mes daoust d'e oll volontez, n'ellas mui davantach.

Bet en devens ar boueur, a drugarez Doue,  
 Da denna deus fonç ar mor ha renta d'ar vuc

Tost da ugent maleurus a voa prest da veuzi ;  
Mes an nerz a vanq dezau na elle ober mui.

Selaouit c'hoas, Bretonet, henvel tud generus,  
Pere en em exposas en ur c'has qen enzus :  
Ra vezo o hanoyou gravet en hor c'halon,  
Ha doue da scuill varne e venediction.

Hanvomp Mathurin ar C'hlanh gant enor christenien,  
Ha Yan Favennec ive, o daou melinerien ;  
Pêr Talyarn, labourer, Colin a Donalam,  
Pini'n deus bet ar boneur da sovetât e vam.

C'hoas e hanvimp gant respet dre bévar c'horn ar vro.  
An daou batron courajus d'an autrou Kersalo ;  
Martial hac ar Marin squer d'an oll Gristeniën,  
An Autrou Bras, brigadier demeus a Bont-Aven.

Bez'e zeus c'hoas a verit mantion enorabl ;  
Mes dont d'o henvel amâ certen n'on qet capabl ;  
Mes, n'eus forç, bezint assur deus hon anaoudeguez ;  
O c'honsianq o-unan zo o dalvoudeguez.

Requetomp digant Doue evito peb boneur,  
Ha meulomp, oll o c'hourach, me ho ped, va breudeur.  
Henor ha gloar da james d'an dud generus-se,  
Pere a deuas eno d'exposi o Due.

*Hanoyou an dud beuzet eus a Barros Moëlan.*

Louis Tanguy, da guenta, a drizec vloas oajet,  
Andréo deus a divrac'h, Michel Richard c'hoezec,  
Martial Bourc'his, pévarzec ; Michel Crez pemzec vla,  
Peguen yaouanq, va Doué ! va c'halon ranq ranna.

Cridor Ladoss, voa oajet a c'houec'h-vla-daou-uguent,  
A lèz daou vinoric paour e carg eus he c'herent ;  
Mari-Cathel ar Maout a zaouzec vloas oajet,  
Yan-Mari ar Fleit a voa bars en e zeitecvet.

Mari-Jan ar Fleit, e c'hoar, e doa daou-varnuguent,  
Demeet abaoe nao mis, ha douguerez ouspen ;  
Mari-Jaquetta Faoglas a zeitec vloa oajet,  
Ha Mari-Louis an Torrec voa en he fempzecvet.

Cathel Ladoss voa oajet demeus a ugent vloas ;  
Mes evit Cathel Colin a voa plac'h yaouanq c'hoas,  
Cetu aze hanoyou an trizec den beuzet,  
Demeus a Barros Moëlan : an oll so glac'haret.

— 4 —

*Hanoyou an dud beuzet euz a Barros Riec.*

Louisa Droal, e devoa tri bloas varnuguent tre,  
Ha Mari-Anna ar Saux daou nebeutoc'h a se.  
Mes neo get hanvet ganeomp c'hoas an oll victimou  
Zo e creiz o yaouanqis bet preyzier d'an ancou !

*Hanoyou an dud beuzet euz a Barros Clohar-Carnoët.*

Yan Strugéon a zaou vloas varnuguent voa oajet,  
Mari-Jacqetta Janlin e doa e fempzevet ;  
Ha Genovefa Janlin, c'hoar d'homâ diveza,  
Na voa qen nebeut oajet nemet a c'hoazec vloa.

Mari-Jan ar Piriou, plac'h yaouanq evit fin,  
Ha Joseph-Mari ar Maout, ur paour-qès orfelin,  
A so ar re diveza a ellan da henvel :  
Cetu gugent maleurus oll er mor o vervel.

Bremâ ta pa zint rentet bars en donar santel,  
Requetomp a greis calon digant an Eternel,  
Ma vezint oll recevet en Pales an Envou,  
Da veza recompancet demeus o maleuriou.

Lavaromp oll, Bretonet, euz a greis hor c'halon,  
Un *De profundis* bremâ en o intañtion.  
Doue ra deyo da scuill var o oll familhou  
Consolation dener ha d'o c'harg a c'hraçou.

**FIN.**

## CHANSON NEVEZ

QUIMIADOU EUR MARTOLOD A VREIZ

Var ton : *An drouc-hirnes* (le mal du pays). *Cetu ar fik a flok.*

Bretonet me o ped didostet da glevet  
 Eur himiad truezus, eun adieu trist meurbet  
 A ra de guervrois quen monet d'ar brezel  
 Eur martolot yaouanq maguet en Breiz-Izel.

An eis-varnuguent a viz maë me oa en faction  
 Oar bont ma batimant bars er rad en Toulon  
 O hortos partia vit mont d'an Itali  
 Oar ben tri de goude, e cleemp ambarqui.

Me gred a oa tremenet an eur a hanter noz  
 A ma hamaradet oa et da repos  
 Netra na drouble neuze ar silanq deus a noz  
 Met ar mor e vurmuri gant eur voues rust a gros.

Ma daou sorn a oa harpet oar ma c'harabinen  
 Dindan ma sreid ar mor bras ac an env us dam fen  
 Heusi ran mignonet pa deuañ da gompren  
 Na ve tre 'n den ac ar maro nemet treus eur planquen.

Pa n'em velis ma human oar bont ma batimant  
 Ep test deus ma glahar, nemet ar firmamant  
 Me gommances hirvoudi gant glahar ac anquen  
 Pa deuas da jong dia a baros Trabrien.

Ma daoulagat oa troet oar su ar vilagen  
 Lec'h a ma da guenta guelet ar sclerigen ;  
 A pa deuis da jonjal em herent ac em bro  
 Gant an dour deus ar mor n'em vesque ma daëro.

Aboue an devez fatal a meus renquet quittat  
 A dont da guimiadi deus ma mam a ma sad  
 Bep nos pa ve cousquet em hunve o goëlan  
 Ac o jonjal 'n o glac'har nos a de a ouelan.

O devez leun a c'blahar, a sisesper c'hoëro,  
 O devez deplorabl a carguet a canvio  
 O quimiad anqueniis a glac'harus meurbet  
 Me mo jong ahanout queit a vin oar ar bed

Gant ma herent er guer e ma nehamant  
 Hi ra ma oll chagrin a ma brassa tourmant  
 Penoz onnonci dé han breman d'ar brezel  
 Aoun meus d'o lacat gant an nec'h da vervel.

Pa glevont quement se a devont calonad  
 Goasoc'h vit an devez a renquis o huitat  
 Ac hi devo courag a oalh vit gallout supporti  
 Ep ma ranno o halon gant eur c'helo quen cri.

Houi sperejo evurus, o sænt a sænteset  
Itrou-Varia-Drue, ma guir vam biniguet  
Reit de ners a courag en o affliction  
Reit de o hassistanç, confortet o halon.

Pelec'h eo et breman querent a mignonet,  
An amzer-se quen douç hac agreabl meurbet  
Pelec'h ma et beman an amzer eürs-se  
A oan en Trabrien a no toesq beimde.

Niget e pel d'ouzin an amzer quen eürs  
A oan sambles guenah camaradet joaüs  
Tremenet e vidon marlese vit james  
Ar bonheur ac ar joa m'emp tanvet assambles.

Pa sei an nevez amser da gargan adare  
Ar guez a vleuo caër ac a selio neve  
Pa seui e oar e his ar guenidel er vro  
Na nimp muia assambles beb sul d'ar pardonio.

Pa oan en o touez oan joaüs a laouën  
Mes breman on mantret ! siouas ! gant an augen  
A ma oll slijadur so bout neur plaç disro  
O sonjal gant glahar em herent ac em bro  
Houi a velle breman Yvonie o mignon  
O pourmen e hunan oar ar rad en Toulon  
O pourmen e unan alies tal a nod  
A daëro e zaoulagat a red var e siouchod.

Me ve c'hoas alies aseet oar, eur roc'hel  
Ma daoulagat troet evar su Breis-Izel  
Mantret gant ar glac'har, a beuet em daëro  
O sonjal em herent so er guer en canvo.

O douar a Vreis-Izel, o ma bro biniguet,  
Pegouls a sono an eur ma hin c'hoas d'ho kuelet  
Pegouls a erruo ar momet ac an de  
A seuio da laquet fin dam c'haptivite.

O debes leun a souzter, debes a eurustet  
Me so chonjal enout beb heur a beb momet  
Doue trugarezus hastet ar momet-se  
Ma hin c'hoas da velet ma bro a ma c'hontre.

Tre ma oan o teplori oar bont ma balimant  
Ar loar a darsas soduen ebars er firmamant  
Neuse me a velas us d'am fen o niget  
Eur guénidel bian evar su Breis-Izel.

O ! prest din me eonic, prest din da sivesquel  
Ma ningin enez plaç da bete Breis-Izel,

Da gonsoli ma hereat quent vit quitat ar Franç,  
A da gas betec eno comson a esperanç.

Mes allas ! me n'allan quet, veldout treuzi an ær,  
Ma a reuq chom aman evel eur prisonnier,  
Evel a oa guechal an Israëlitet,  
Pel amser o hortôs an douar prometet.

Martese feus eonic seuiset da sivesquel,  
O nigel dreus d'ar mor, o tont deus eur vro bel,  
Pleg eta da esquel a so bet pel digor,  
A repos eur momad en quichen map Arvor..

Disquen eta eonic eur momet en c'hichen,  
Ma scrivin eur lizer da gass da Dabrien ;  
A pa meus quet veldout, ar bonheur dont d'ar guer,  
Te vo da viana vidon eur messenger.

Querquent evel ma vi digaoet en Breiz-Izel,  
Te vo, eonic bian, ma messenger fidel ;  
Te rei ma gourhemen er guer pa errui,  
Ac a laro dam zud a han d'an Itali.

Grit ma gourc'hemeno d'an tad neuz ma maguet,  
Mæs allas ! da mam baour, da hones na ri quet,  
Rac bæ zou partiet demeus a Vreiz-Izel ;  
Eouet da jouissa deus ar gloar eternal.

Lar adieu d'am breudeur a d'am c'hoarezet,  
Goude d'ar belec coz a neveys ma badeet,  
Na ancoue hini bet demeus ma mignonet  
A lar de a zonjan enno en peb momet.

Lar de eonic bian, pedi vidon bepnôs,  
An Itron Varia patrones ma faros,  
Ma teui d'am preservi en creis an dangerio,  
A ma raï din ar c'hraç da retorn c'hoas d'am bro.

Mar a teufe dit c'hoas pa vi en Breiz-Izel,  
Rancontri eun deves ma mignones fidel  
Lar dei a so guelet Yvonic e mignon,  
Hober gard eun noves oar e lest en Toulon.

Assur dezi er sad, dre broposiou touchant,  
Meus hopret eviti eur garante ardant,  
Lar dei a ha breman ma c'horf d'an Itali  
Mæs ma c'halon a vo da virviquen ganti.

Pa zeï a neves amser te a iel alies,  
Da gana, da fredoni, da quichen hi frenes  
Perac ne allan me nijel eur vec'h guenoc'h  
A mout de saludi betec e zi, veldec'h.

Mæs gra ebars em flaç, a lar dei dre da son  
Derc'hel jonch da viquen demeus e guir mignon,  
Pec'hini zo allas! pel deus a Vreiz-Izel,  
En eur lest oar ar mor foetet gant an avel.

Pa vin en Itali en creïs ar c'hombajo,  
Creïs an tan, ar mitraill, a cros ar c'hanonio.  
Neuse eo a tevio ar muian da jonch din,  
Deus an amzer eurus so nijet pell d'ouzin.

Mar teu din da vont tiet gant eur boulet traitour,  
Ac achui ma deïo en eur vro estranjour,  
Neur gonean d'an douar c'hoas queni evit mervel  
Ma daoulagat a droo evar zu Breiz-Izel,

Ma daou lagat a droo evar zu Breiz-Izel,  
Da laret d'am c'herent e adien eternal,  
Da laret d'am mignonet an adieu diveza,  
A quen ar bonheur d'en em velet bars ar joa.

Mar a velit eun de naur len ar gazeto,  
Ma hano siouas din voar bultin ar maro,  
Querent a mignonet c'hui laro gant glac'har,  
Graç dean digant Doue da repos bars er gloar.

Quent evit finissa goulomp digant Doue.  
Vit ar martolot quez hep sort prosperite  
Pedomp a vir galon Roue an armeio,  
D'em preservi en creïs quement a dangerio.

Offromp c'hoas on veuio da stereden ar mor,  
Vit an oll soudardet deus on bro gær Arvor  
Goulomp gant confianç pedomp hi gant ferveur.  
Da bellat dioute peb goal chanç a goal heur.

Rentomp meulideguez da arme gær ar Franç,  
D'hon Prinç quen generus, a leun deus a vaillanç  
Pere guita o bro vit mont da gombati,  
Evit independanç oll pobl an Itali.

Canomp breman n'eur voues, canomp tout assembles  
Ra vezint enoret a meulet da james,  
Canomp ta Bretonet, deus fons on c'halon,  
Gloar ac enor d'hon arme, viv Napoleon.

Neb a neus composet ar son ma peñ da ben  
So ganet a maguet en paros Trabien,  
A neuz he c'homposet oar an ton di c'hana,  
Canet-hi ta, Bretonet, vit n'em divertissa.